




KANTIK NEVE
ZANT ERVOAN


(Moulet evid ann eil beach.)

Marziale.

Leaz-Breiz



N'en euz ket en Breiz, n'en euz ket u-nan,



N'en euz ket eur Zant e-vel Zant Ervoan,



N'en euz ket eur Zant e-vel Zant Ervoan.

War don: *Leaz-Breiz*, (el levr *Barzaz Breiz*), pe *Rouanez Arvor*.

N'en euz ket enn Breiz, n'en euz ket unan,

N'en euz ket eur Zant evel Zant Ervoan. (bis)

N euz ked enn Argoad na mu enn Arvor,
Kouls ha Zant Ervoan vit ann dud a vor.

N'euz ket barz ar vro, dre-oll e lerer,
Hag e ve ken mad vit al labourer.

N'euz ket kaeroc'h skouer d'ann dud a lezen,
Evid Zant Ervoan, skouer ar veleien.

Ha d'ar bevien gez ha d'ann dud a boan,
N'en euz ket gwelloc'h evit Zant Ervoan.

*N'en euz ket enn Breiz, n'en euz ket unan,
N'en euz ket eur Zant evel Zant Ervoan. (bis)*

N'euz chapel e-bed enn bro Breiz-Izel,
Evid-on ker koant ha m'e he chapel.

Mar fell d'hac'h pedi ha pedi er-vad,
Et d'ar Minihi da glask ho mennad.

Dousan m'e pedi, pa oer trubuillet,
Elec'h ma pedaz ar Zant binniget!

Dousan m'e gwelet ar maner zantel,
Elec'h m'e ganet Zant braz Breiz-Izel !

Maner Kervarzin a welaz ive
Ine Zant Ervoan o ninjal d'ann Ee.

*N'euz Chapel na ti em bro Breiz-Izel
Vel ti Zant Ervoan ha vel he chapel*

N'en euz ket enn Breiz eunn iliz ker kaer
Hag he iliz-veur enn kear Landreger.

Evit Zant Tual, ho Tad binniget,
Otro Zant Ervoan, c'houi 'n euz hi zavet.

Enon man ho *Pe* ha n'euz ket er vro,
En efe gwelet mu a viraclo.

Me deui war-n-ehan euz a Gervarzin,
Hag e ve red d'in dont war ma daoulin.

Dister oa ho *Pe*, re dister, allaz !
Adzavet eo bet kaeroc'h vit biskoaz.

*N'en euz ket enn Breiz evel Zant Ervoan,
Ken kaer hag he *Ve* na zo ket unan.*

Eskop Zant Ervoan en da hel laret ;
Ni neuz zikouret, vel gwir Vretoned.

Kerkoulz ha Treger, Goelo ha Kerne
Neuz laket ho min barz ar Be neve.

Ha hep dale pell vo eur pardon kaer,
Oll iskibien Breiz barz el Landreger.

Oll iskibien Breiz gand hon Eskop-ni,
War ve Zant Ervoan, a deui da bedi.

Hon Eskop neve en euz hen laret,
Ha gant Zant Ervoan e vezo peet.

Ha ni, Bretoned, ni lar a-unan :

Bennoz d'an Eskop a gar Zant Ervoan :

Ann otro Zant Ervoan a zo bet interret enn Katedral Landreger, dreg ar gador zarmon. Gwech-all en evoa enon eur be kaer. Hirie eo bet ad-avet euz ar c'haeran gant ann Otro BOUCHÉ, hanvet da viken *Eskop Zant Ervoan*, ha ker karet gant ar Vretoned. Enor d'ehan war ann douar ha joaio ar baradoz er bed-all !

Eur beden evit-han, pelerined-vad, pa daoulinfet war ve ann Otro Zant Ervoan.

Neb a gano ar c'hantik-man gand doujanz Doue, a c'honeo daou-ugent devez induljanse.

Landreger, enn driouac'hed a viz Mae, 1883.

† EUGÈNE-ANGE-MARIE,

Eskop San-Brieg ha Landreger.